

# Klenved ar merc'hed e moa !

*cf. Annales de Bretagne  
t. XLVI, n° 3 et 4. 1939.  
Signalé par M. Allivier  
sous le n° 846.*

*Achetez pour moi au pardon  
de Lormer, le 11 sept 1932.*

War ton nevez : *Tout le pays l'a su !*

1

Tostaït 'ta, selaouit, paotred yaouank,  
Ha c'houi glevo ganen ar wirionez.  
Dimezet oun breman, kaozeal a c'hellan  
Vid esplik a d'eoc'h ar vriedelez.

2

Eur poent zo bet, me a gare ar merc'hed,  
Gantho, me am ije great tro ar bed.  
Breman, me a zafe kentoc'h da guzet :  
Gant va greg, ne vezan ket o kousket.

3

Oh ! ar merc'hed n'int mad nemet da iouc'hal  
Var o goazed p'o deuz evet guin ruz.  
Va hini-me lak ac'hanon da zansal ;  
Er gear, me zo eur paourkeaz maleruz.

4

Pa deu en ti awechou eun tam aoutrou,  
Me vez lavaret d'in mont da redet  
Vid mont e kear da ober ar c'homisionou ;  
Pa deuan en dro, ar guele vez tronset.

5

Va hini goz, he daoulagad o vrilla,  
Hag a aoutrou, ouzin, vez o c'hoarzin.  
Var an daol, me a rank lakat ar bara,  
Toma kafe ha servicha ar guin.

6

Me a rank mont noz-deiz da labourat :  
Ganthi, anez, me a vije drebet.  
En dro pa deuan, na me a rank luskelat  
Betek ma vez ar re vihan kousket.

7

Paotred yaouank, selaouit 'ta va janson,  
Dimezit ket, kar goelit va buhez :  
Me zo er gear falloc'h evid er prison.  
Bezit euruz, glaskit ked eur vaouvoez.

8

Oh ! ar merc'hed a zo tud dibalamour :  
O goazed ne blijont james d'ezho.  
Hi a evo guin ha c'houi evo an dour.  
Oh ! lezit 'ta, lezit 'ta anezho.

**EUR C'HASTELLAD.**